

## K A N T I K

ENN ENOR

## D'ANN ITRON VARIA FANTANIO

PATRONEZ PARROUZ PONTREV

## DISKAN.

*Itрон Varia Fantanio,  
Euz ann env hon chileouet ;  
Ra vezo bepred hoc'h hano  
Er barrouz-man enoret !*

1.

Pell a ze eo bet d'ac'h goestlet  
Ar c'horn-man euz Breiz-Izel :  
Gant hon zado eo bet laket,  
Gwerc'hez, dindan ho skoazel.

2.

Nag a wech, o ma Mamm santel,  
Ec'h int deut braz ha bian,  
Da daoulinan enn ho chapel,  
Savet enn-tal ter fantan !

3.

Ouz ho treid, enn-pad ho bue,  
E kevent ners, sklerijenn,  
Hag arok mont dirag Doue  
C'houi a c'helvent d'ho difenn.

4.

Kerkoulz ha gwech-all, ô Gwerc'hez,  
Enn Pontrev c'houi 'zo karet ;  
Bepred ec'h oc'h hon Fatronez,  
Ha bepred gan-imp meulet.

5.

Dirak hoc'h imaj binniget,  
Douget d'ann iliz neve,  
E weler bemde daoulinet  
Lod vraz euz ho pugale.

6.

Arok kouitaat douar he vro,  
Ar martolod n'ankoua ket  
Dont da laret d'hac'h kenavo  
Ha d'ho pedi d'hen miret.

7.

Pe deui ar mor gand he wajo  
'Vit lonkan ar merdead,  
Da gad Itron ar Fantanio  
E troo he daoulagad.

8.

Ar vamm a oestl d'hac'h he bugel,  
Hag ar plac'h fur he c'halon ;  
Ar pec'her dindan ho mantel  
A gav zikour ha pardon.

9.

Ar c'hlanvour paour, war he wele,  
Hag ann oll dud glac'haret,  
A oar ec'h oc'h leunn a drue :  
Gan-hac'h e vent konfortet.

10.

Trugare vit hoc'h oll graso !  
Kentoc'h e paouse ar goad  
Da redek enn hon goazio  
'Vit ma teufemp d'hoc'h ankouaat.

11.

Enn noz diarok ho pardon,  
Dre hon ruio kempennet,  
C'houi a dremeno, o Itron,  
Seder ha joauz meurbed.

12.

Douget gant ho martolodet,  
Enn dro d'hac'h ho pugale,  
Dindan ann env steredennet,  
C'houi 'vo kaer vel goulou-de.

13.

Ha mar be skler bolz ann envo,  
Ruio Pontrev 'vo ive :  
Enn noz-se gant ho goloio  
E voint skler evel ann de.

14.

Itron Varia Fantanio,  
Reit d'imp bemde ho pennoz  
Ha miret enn hon c'halono  
Fe birvidig hon zud koz.

15.

Pellaet diouz-imb ar pec'het,  
Hon dalc'het 'barz ann hent mad,  
Ha gand Doue pe vimp galvet,  
Deut, zerret hon daoulagad.

16.

Hag er baradoz ni 'gano,  
Ni a gano adarre :

« *Itron Varia Fantanio*  
*A zo mad d'he vugale !* »

Neb a gano ar c'hantik-man gant doujanz Doue, e roann  
d'ehan daou-ugent devez induljanso.

*Zan-Brieg, enn eil war-n'ugend a viz Ebrel 1881.*



† AUGUSTIN,  
ESKOP SAN-BRIEG HA LANDREGER.

Landreger, e ty AR FLEM, Moulter.